

Ar Rouantelez imaginer
Pe va vtre .

(369)

Ma ven Roue, cléo, Yan, ma n'er gouzout,
Petra, me Fanch, a ve demeus va gout ;
Ur marc'h am be gant ur blumachen venn,
Quintet varman, me ve bepret er penn,
Fier meurbet, o vessaat va gaout,
Rac peadra am be neuze da gaout,
Ma ven Roue .

Ma ven Roue, a respont Yan da Fanch,
M'em be ractal ha pal, ha forc'h, ha trançh ;
Mes d'am zad qez, me rofe calz a aour,
Ha crampoerz lard, ha quiz cöz d'am Mam baour ;
D'am oll beorien me rofe bara quenn,
Ha bep mintin ur scuodellad souben,
Ma ven Roue .

Ma ven Roue, n'em be bepret em penn
Nemet dre oll laqat heuill al lezen,
Renta contant tud va rouantelez,
A venigfe bemdez va madelez ;
Hac evit se 'qemerfen evit saier
Hoy Roue mad, hor mignon, hoy tad qer,
Ma ven Roue .

(370)

Ma ven Roue, me choasfe da vignon
Un den honest a garfen a galon,
Hac a deufe gamen da besqeta,
Da chasséal ha da nezqeta ;
Neuze 'laqfen, evit dioial va qz,
Bepret, nös-deiz ur parfifoueltron qz,
Ma ven Roue .

(371) Ma ven Roue, Marie, va doufiq qeiz
 A ve certen neuze va Rouanez ;
 Rac bez' e deus ur galon ar quella,
 Ha ganti ven, assur, an eürussa ;
 Mes ne allan rei nemet ur galon,
 Hac en offrân vel ma rafen un tron
 Ma ven Roue.

Ma ven Roue,..... Perac ur zonch qer zot ?
 Eürus bras oun ; c'hoantât se zo diot.
 Tostic d'am zud, ouy contant evellen.
 Petra eta a alfen da c'houlen ?....
 Me ver en peoc'h ebaro va ziic pilous ;
 Hei n'em be get michanq muioc'h a drous,
 Ma ven Roue ?

A. Lédan.

(Vol. III, p. 369-371.)